

Bandenn DRESET : an ARZH (Heul)



Kazetenn divyezhek bugale CM2 Skol J. Morand
Lannuon.

merour: J D Robin

miz c'hwevrer 1989

Editorial

Chers lecteurs,

Nous vous remercions d'avoir acheté le deuxième numéro de notre journal et nous vous présentons nos meilleurs voeux pour cette année 89. Cette année nous allons changer le prix de notre journal qui était de 5F et qui rapportait moins d'un franc par numéro . Voyant le travail que nous faisons pour un si petit bénéfice nous avons décidé d'augmenter le prix. Son contenu sera écrit au sommaire du journal que nous n'avions pas fait pour le numéro 1. Nos activités furent dernièrement : notre voyage à Rennes pour aller voir nos correspondants et dormir dans leurs familles, la journée de solidarité pour l'Arménie, le 20 décembre, et une activité que nous pratiquons à l'ASPTT, du hand-ball . En vous remerciant encore d'avoir acheté ce numéro, nous vous souhaitons une bonne lecture!!!

20.XII.88: JOURNEE DE SOLIDARITE POUR L'ARMENIE A L'ECOLE JOSEPH MORAND

Nous avons décidé le 20 décembre 1988 d'organiser une journée de solidarité pour l'Arménie. Après le terrible tremblement de terre qui fit 4500 morts, qui détruisit Spitak et Leninakan, des milliers de familles se trouvèrent sans abri. Nous sommes allés dans notre école pendant trois jours par groupes de trois dans chaque classe pour ramasser vêtements, argent et jouets pour le Noël des enfants Arméniens. Nous avons ainsi collecté 650FF pour l'Arménie. Nous avons aussi fait des affiches qui représentaient le drapeau Arménien et où il était écrit: solidarité Arménie, 500000 sans abri. Ces affiches ont été opposées dans chaque classe de l'école. Après avoir ramassé vêtements, argent, et jouets, notre maître, et la mère de Johan sont allés à Rennes pour y remettre à SOS Arménie ce qui avait été collecté. Le tout partait en train pour l'Arménie. Cela demandera beaucoup de temps, surtout à la frontière de l'URSS où l'on fouille les trains de fond en comble.

Ronan An ESKOB

- 13-12-88: Un dorgenn da lakaat ar c'hirri da vont gorrekoc'h a zo bet savet e kroazhent ar Rallye.
- 15-12-88: 450 den a zo aet da welet ar " Chieftains" sonerien iwerzhonat anezho o tremen e Lannuon.
- 17-18-12-88: E Plounerin ez eus kouezhet ur peul tredan war karr Ivon Brignou. Torret ez eus bet kostezennoù anezhañ.
- 19-12-88: Aet eo bugale CP-CE-CM klasoù divyezhek Lannuon da weladenniñ ar-re gozh e ospital Kergomar.
- 24-25-12-88: Pedet ez eus bet bugale paour d' ar geriadenn gallian e Ploveur evit un adverenn.
- 28-12-88: Tri devezh gouel e Planetarium Ploveur gant Soazig Noblet, Padrig Ewen ha Jean-Michel Gwilhanton.
- 30-12-88: Ul laeronsi a zo bet e Trebeurden. 100 000 FF bravigoù a zo bet laeret.
- 01-1-89: E karter Kerligonan, e Lannuon, ez eus bet savet ur sal emvodoù e-pad 2 zevezh gant 800 kant den, testoù Jehovah anezho.
- 04-1-89: An eog ne c'hellont ket distreiñ d'al Leger abalamour d'an diouer a zour.
- 05-1-89: Aet eo kuit an daou glas CM2 kentañ eus Lannuon d'ober ski en Alpoù. 10 diwar 11 klas CM2 Lannuon a yelo d'ar menezioù. Hon c'hlas eo an hini na yelo ket.
- 06-1-89: Lemet e vo 30 post-labour e embregerezhioù pellgomz Ploveur a-benn 2 vloaz.
- 08-1-89: kempennet eo bet en-dro ar gwinojennoù-bale a oa bet diskaret e-pad ar gorventenn vras. 600 km anezho a zo e Bro-Dreger.
- 10-1-89: Sach-blev e ti-kêr Lannuon, abalamour d'ar "CAL" en-dro.
- 13-1-89: Gwez fav ha derv a vo plantet war 500 devezh arat e koad Beffou.
- 17-1-89: 1000 arvester a zo deuet da selaou c'hoarigan "Carmen" e sal

sportoù Lannuon.

18-1-89: Un diskouezhadeg war tiezh-Breizh a zo bet e Lokmikael.

19-1-89: Un diskouezhadeg war ar SIDA a zo bet staliet e sal-veur an ospital.

21-1-89: Gouel klasoù divyezhek Lannuon e kreizenn Jean Savidan d'ar sadorn beure.

23-1-89: Emvod kelaouiñ war ar DEUG Brezhoneg gant APEEB, UGB, KSL ha Diwan.

24-1-89: Difraostet eo bet ur c'hilometrad gwinojenn-bourmen gant ar gevredigezh "Botoù Kawan".

25-1-89: Gevellet e vo Plistin gant Shandong, e Bro Sina.

26-1-89: Aet eo bugale CM2 divyezhek skol Joseph Morand da werzhañ o gazetenn war ar marc'had.

27-1-89: lakaet ez eus bet da vont en-dro ul levraoueg bale-bro gant kevredigezh "Tro kanton Bear".

28-29-1-89: Kiniget eo bet listenn Alan Gouriou evit dilennadegoù d'an ti-kêr. Emañ tad Rival, tad Lena, tad Ronan Jikel, mamm Frederi ha mamm Thibault e-barzh.

Klêñved ar saout nij

Klêñved eo ar saout nij peogwir o deus debret habz a c'hast gant baheriennoù o doa kresket neuze ur goumoulenn rogedet. eton dra-se a-ra burbuemmoù gwer war benn ar saout ha n'eostet o laezh mat evit ar re nihan ken. Dre c'harns n'eostet gwerus bre an dra-se. Ne ra nemet jikoù bikom meten war fri al leusoù hag e ro an hink dezho. et c'hleñved-se a zo digouezhet e miz c'hwerter ya oa ar saout nij o mijal ha us da Varselona. Juliette Bonnin. E

17,18-XII-88 :Manifestiñ a ra micherourien Doux Peder neg e straedoù Gwengamp ;evit difen ho labour.

19-XII-88:Punsoù a vo kleuziet e dezerz an Tenere gant sikour DPT Aodoù an Hanternoz .

20-XII-88:Goude 4 miz stourm eo bet serret stal Doux e Peder neg.

21-XII-88:Distrujet ez eus bet 2 beul tredañ gant an ARB e Kastellin hag e Brieg .

23-XII-88:Ul lazhdì nevez a vo digoret e Lambaol.

26-XII-88:Ijinet ez eus bet un ardivink evit mirout ouzh al laboused da vezañ lazhet gant an tredañ.

28-XII-88:Lazhet ez eus bet ur skoul roueel gant ur chaseour nepell eus Sant-Brieg.

29-XII-88:Ne vo ket distrujet an holl gaol-fleur a zo re : un darn a vo profet da "Ostalerioù ar galon ".

31-XII-88:Lezet zo bet a vont er mor 40 gilometrad eoul gant ur vag-karg-eoul e-kichen Enez Eusa.

02- I-89: Aet eo a vag "An Erminig Vras" kuit eus Sant-Malo evit mont da besketan e Sant-Ber Mikelen.

03- I-89: Daleet eo bet kentan"TG V-Atlantel" betek penn kentañ miz meurzh.

04- I-89: Difennet eo dastum kregin Sant-Jakez a-raok fin miz genver.

05- I-89: 3000 plas ouzhpenn a vo e liseoù Breizh a-raok fin ar bloaz.

06- I-89: Digwezh et eo JL Chrétien e Montroulez e lec'h m'eo bet degemeret gant kantadoù a skolidi.

07- I-89: Mont a raio kuit an embregerezh "Kastell Rok " eus lizio peogwir ez eus re a nitrat aze.

09- I-89: Votet ez eus bet 64 milion lur gant kuzul ar rannvro evit sikour an dud da chom war ar maez.

12- I-89: Digouezhet eo rektor nevez akademiezh Roazon,Herbert Maisl e

anv.

- 13- I-89: 173 milion.lur a zo bet roet gant kuzul ar rannvro d'ober hentoù nevez e Breizh .
- 14,15-I-89:Ne vo ket pompet dour ken e Lennon (kreisteiz Penn ar Bed) abalamour d'an nitrat .
- 17- I-89: Kavet ez eus bet ur reunig klañv war an draezhenn e Beg Trevignon (29) gant an itron Gwilhoù.
- 19- I-89: Digouezhet eo an TGV Atlantel e Sant-Brieg.
- 20- I-89:Jean Le Baillant eus ASPTT Lannuon en deus gounezet plas kentañ redadeg youst e Breizh .
- 21- I-89: Lid degemer an TGV "Naer Glas" e Sant-Brieg barrek e vo da vont a hed 300 km e-pad un eurvezh.
- 23- I-89: Digoret eo bet en dro maengleuz mael-karaee,e lec'h e vez tennet maen-glas.
- 26- I-89: Kavet a zo bet un doare da vont a enep saotradur an nitrat e Elliant (29).
- 27- I-89: Un Douarnenezad en deus ijinet ur c'hoari nevez:ar stracheck,tost d'an echedoù,nemet e vez ret pevar c'hoarier dezhañ.
- 30- I-89: UR gwallzarvoud kirri spontus a zo bet war ar gourhent etre Montroulez ha Brest abalamour d'al latar:2 zen marv ha 10 den gloaziet.
- 31- I-89: Steven Cardon a vo lakaet e penn laz seniñ Breizh e Roazon.
- 02-II-89: Emvod etre dilennidi Breizh hag an Ao Geoffroy e minister an deskadurezh e Pariz: nac'het en deus an Ao Geoffroy krouiñ an DEUG Brezhoneg.
- 04-II-89: Manifestadeg bras evit an DEUG Brezhoneg e Sant-Brieg.

- 13.XII.88:An Ao. Jospin a soñj dezhañ e vije mat d'ar skol bezañ aesoc'h evit ar vugale .
- 19.XII.88.Un embregerezh nevez 3 000 den a vo savet e -kichen Valenciennes gant Fiat ha Peugeot .
- 22.XII.88:50 000 den dilabour nebeutoc'h a zo bet e Bro C'hall e-pad an 2 viz diwezhañ
- 30.XII.88: Lezet eo bet da vont div blac'h J.Valente bet skrapet gant strollad Abou Nidal.
- 01.I.89:Adkavet he deus ur giez he mistri e Ospital Alençon, un devezh goude ar gwallzarvoud e lec'h ma oa bet kollet,goude bezañ bet o redek war 10 km .
- 04.I.89:Prenet a zo bet 100 "Aibus 320" gant an embregerezh "Braniff". Talvezout a ra ar c'hevrad -se da 21 miliard FF.
- 08.I.89:Distro ar "Bêbête show " war TF1 e-pad teir sizhun.
- 10.I.89:Kemer a raio perzh e adsavadur Spitak en Armenia an tisavour Berdje Agopian en doa treset tachenn football "La Beaujoire" e Naoned.
- 11.I.89:Kinniget o deus Rocard ha Jospin e vefe desket ar saozneg adalek ar skol gentañ, evit dont da vezañ barrek da werzhañ muioc'h d'an estrenbroioù.
- 12.I.89:Tapet eo bet e Baiona (Euskadi) J.A Uruticoetchea penn an ETA.Gant 7 kamalad dezhañ.
- 13.I.89:Adlakaet e vo da vont en- dro kreizenn nukleel Creys-Malville.
- 14,15.I.89:Ganet ez eus bet 6 babig kevellet gant ur vaouez e Pariz.
- 18.I.89:Diouer a c'hlav e Bro C'hall a-bezh,nemet e Bro Normandi.
- 20.I.89:Paket ez eus bet un den hag a labourere er mirdiez hag a oa kustum da laerezh un dra bemdez enno.
- 25.I.89:Lemet e vo 2 700 post-labour er stal Renault er bloaz-mañ .
- 26.I.89:Harzh-labour ar gelennerien abalamour da re a vugale er c'hlasoù.

13.12.88: Aet eo Yasser Arafat d'ober e brezegenn dirak bodadeg-veur an ONU e Jenova.

15.12.88: Ur bladenn glask-eoul a zo aet d'ar strad er Meurvor-Atlantel.
27 den a zo bet saveteet goude bezañ bet chomet 24 eurvezh en ur bib.

17.18.12.88: War welaat emañ an darempredoù etre Bro Sina ha Bro Indez.

19.XII.88: Lech Walesa sekretour "Solidarnosc" a vod strolladoù ar vro evit klask un disorc'h da diaesamantoù ar vro.

20.XII.88: Aet eo ar Gebekiz da vanifestiñ e Montreal da zifenn ar galleg...

21.XII.88: Ar Breizhad J. L. Chrétien a zo distroet eus e veaj ur mizvezh en ec'honder.

22.XII.88: Kouezhet eo ur c'harr-nij eus ar Panam e Lockerbie, Bro Skoz: 258 den a zo bet lazhet.

23.XII.88: Degemeret eo bet Y. Arafat gant ar Pab e Palez ar Vatikan, e Roma.

24.XII.88: 26 milion lur a zo bet dastumet gant Kroaz C'hlas Armenia evit sikour an dud en Armenia.

28.XII.88: Dizoloet o deus enklaskerien an FBI e oa bet lakaet ur vombezenn e karr-nij ar Panam kouezhet e Lockerbie.

30.12.88: Kondaonet eo bet Abou Nidal d'ar marv gant an OLP.

31.XII.88: Abaoe 3 miz ha 10 devezh, a zo bet roet 30 litrad gwad nevez d'an Impalaer Hiro-Hito tost d'ar marv.

03.I.89: Degemeret eo bet ministr kentañ ar Republik Saharaoui gant Hassan II, Roue Maroko.

04.I.89: Daou garr-nij chase Lybian Mig 23 a zo bet distrujet gant kirri-nij Amerikan "F 14 Tomcat".

05.I.89: Kement a saotradur-aer a zo ha n'eus ket plas ken e ospitalioù Madrid da barean an dud klañv o skevent.

07.I.89: Marv eo Hiro-Hito Impalaer Bro Japan d'an oad a 87 vloaz.

08.I.89: Kouezhet eo d'an douar ur boeing 737 e kichen Leicester, Bro Saoz.

Tro-dro 44 den marv a zo.

09.I.89:Ar vroadelourien afghanat a gendalc'ho ar stourm betek na vo soudard russianat ebet ken en o Bro.

10.I.89:Rediet eo Peizanted Bro Romania da zilezel o ziez evit mont da lojañ e savadurioù uhel.

11.I.89:6 armeniat a zo bet kavet en ur c'hav e Leninakan, 35 devezh goude ar strakadenn.

14.I.88:Skrpet eo bet an Ao Van Den Boynens kentañ ministr kozh Bro Veljia.

16.I.89:Laeret ez eus bet daou garr-samm eus Bro C'hall e Bro Armenia.

18.I.89:Kuitaet o deus Ronald Reagan hag e wreg an ti gwenn o leñvañ.

20.I.89:Staliet eo bet George Bush da Brezidant ar Stadoù-Unanet.

21.I.89:Aet eo ar maout gant skipailh Rugby Bro C'hall a enep hini Iwerzhon e Dulenn (26/21).

22.I.89:N'en deus ket nac'het Fidel Castro e teufe ar Pab enezenn Guba.

23.I.89:Marv eo Salvador Dali al livour brudet-tre en ospital Figuera (Bro Gatalonia)

24 01 89 strakadenn-zouar e Republik an Tadjikistan (URSS) miliadoù a dud lazhet.

BROIOU-ALL

Gant Caroline Plédran


Ar boued e USA

Debret e vez sandwiches ha hot-dogs", "hamburgers", "cheeseburgers". Sukret eo ar sezo, ar fourmaj hag an hilienn winegr ivez ... Met an Amerikaned a zebr madigoù hep sukr evit chom hep tevaat... Ne vez ket kavet alies sezo hep sukr ebet. Pizza a vez debret ivez. Lavaret e oa bet ur wech gant an tele e oa plastig e plas ar fourmaj: kendalc'het o doa an dud da zebrin anezho. Pa vez goulennet ur pizza ez eus tri stumm; unan vras, unan etre, hag unan vihan. Bras-mat eo evidomp ar re a vez bihan evit an Amerikaned !..

L'appel de la forêt

de Jack London

Buck est le chien du juge Miller. Il mène en Californie une vie paisible et luxueuse. Il est vendu un jour à un trafiquant de chiens par un domestique de son maître. Après un terrible voyage enchaîné dans une cage, il arrive en Alaska où il découvre la neige et le froid. Buck, à qui fut toujours offert sa nourriture, va devoir travailler pour la gagner. Il devient chien de traîneau au service postal. Son apprentissage sera dur mais rapide. Il saura se faire respecter, par sa force et son intelligence, des autres chiens de la meute ainsi que de ses maîtres. Après une saison de très dures courses au transport du courrier, épuisé, il est revendu à des chercheurs d'or. Ceux-ci n'ont aucune connaissance des traîneaux et des chiens. Un jour, à bout de force, il est recueilli par celui qui va devenir son meilleur ami: John Chornton. C'est à ce chercheur d'or qu'il donnera toute sa reconnaissance et son amour. Plusieurs fois, Buck risquera sa vie pour John. Avec lui, il part en expédition vers les terres vierges connues des indiens seuls. C'est là que Buck va ressentir pour la première fois "L'appel de la forêt" dans l'immensité sauvage des bois et des lacs. C'est sa rencontre avec un loup qui va décider de son destin. Ce nouveau compagnon va lui enseigner la vie sauvage et libre, loin des hommes et des maîtres. La mort de John tué par les indiens, coupe le dernier lien qui faisait de lui un animal domestique. A la tête d'une horde de loups, il vengera son ami.



AVORIAZ

Nous quittons Valmorel sous un soleil de plomb, direction Avoriaz. Nous repassons par Albertville et Ugine où la route passe le long des gorges de l'Arly. Voilà Megève avec dans le lointain le "Mont Blanc" et ses neiges éternelles. Nous suivons l'autoroute "Blanche", passons un petit col et nous voilà dans la belle vallée de Morzine où les chalets sont très nombreux. Nous commençons à monter les lacets du col d'Avoriaz. pendant la montée nous voyons des delta-planes passer au-dessus de notre voiture. Les premiers bâtiments nous apparaissent.

-<<Si notre logement se trouve là-dedans, je ne passe pas une seule nuit ici.>>dit papa. Avoriaz quelle horreur! Des poubelles traînent partout, la chaussée est défoncée et pourtant les individus sont si nombreux que l'on se croirait dans une grande ville à la sortie des usines. Des camionnettes qui font les navettes, transportent les bagages à domiciles. Les batiments vus de l'extérieur sont sales mais de l'intérieur sont beaucoup plus propres. Les appartements disposent d'une cuisine, d'une salle de bain, de lits superposés etc...

Nous sommes trop tard pour repartir tout de suite, mais dès le lendemain matin le départ s'effectue.

Avoriaz est décidément une station d'hiver!

Johan Ar C'helenneg

Respontoù divinadelloù Nenn 1

1-Ar pesk ebrel. 2-Ar skeud. 3-An heklev. 4-Ar goulou koar. 5-An orolaj.

DIVINADELLOU:

- 1- Ur bugel a zo o vevañ er seizhved estaj; kemer a ra bemdez ar bignerez betek ar pempved estaj hag e bign an daou all war droad, perak?
- 2- Peseurt miz pe mizioù o deus 28 devezh?
- 3- Ma zad en deus ur bugel, ha n'eo ket ma breur, piv eo?
- 4- Peseurt diforc'h a zo etre ur jeneral hag un dihunter?
- 5- E peseurt miz e vez komzet nebeutoc'h?

ISTORIOU FENTUS:

- 1- Un den a zo e-barzh ur bignerez etre an eil hag an trede estaj. Goulenn a ra sikour. Rener ar savadur a lar dezhañ:
"Gortozit: lavaret hon eus d'ur mekaniker dont.
- Gouzout a ran; me eo ar mekaniker!"
- 2- "Mammig, lavarout a rez e teu hor amezeien eus ar c'hreisteiz.
Ha ni, eus pelec'h e teomp: deus ar beure pe deus an noz?"

Mont da besketañ

Parz'an da besketañ e kemeran ur wialenn
besketañ, un neudenn besketañ, un higenn,
plomennou ha brizhuq. E penn an

neudenn e stagan an higenn; un

kammig a. no d'an higenn e stagan
div pe div plomenn.

Ufar an higenn e lakan ur vuzhuqenn

. Eforde m'an eus nemet teurel an

neudenn en dour; Ha gortoz!!!...

Eoulven An E'halvez.cm1

une dame
 une dame de lannion
 a fait cuire un gros dindon
 une dame de parvis
 a fait cuire deux gros radis
 une dame de plouaret
 a fait cuire une courgette
 une dame de dinard
 a fait cuire un gros canard
 une dame de perros
 a fait cuire une belle rose
 une dame de caran
 a fait cuire un éléphant

cp dirvzhek

kollet eo laurent
 pelec'h emañ?
 war penñ an olifant.

kollet eo christian
 pelec'h emañ? e ti
 laurent.

kollet eo thomas
 pelec'h emañ? e bro
 ofrika.

kollet eo vrell. pelec'h
 emañ?
 e jardin katell.

kollet eo jean-marie
 pelec'h emañ? war
 toenn an ti.



Ar Gouren

Ar gouren a zo ur sport breizhat,un tammig heñvel ouzh ar judo . Pa vez graet ur gejadenn e vez kroget gant daou c'hourener o vont war raok betek ar c'hreiz. Stardañ a reont o dorn neuze hag e reont tri fok gant o div jod ; stardañ o dorn a reont c'hoazh ha krog int da c'houreniñ .Difennet eo lakaat an dorn pa vez lakaet an den war al leur .A bep seurt a grogadennoù a zo :ar gouriz a-raok,ar gouriz a-raok untu ,ar gouriz a-dreñv,an taol kann revr ,ar c'hliked a-raok,hag all... E -pad ar goañv e vez gourenet war balennoù en ur sal ;en hañv e vez c' hoariet er-maez war ur gwiskad skolpennoù.

VISANT PINCEMIN .

Le judo

Peut-être aurez-vous envie de pratiquer le judo lorsque vous aurez appris que: le judo est un sport de combat, d'origine Japonaise dont les techniques proviennent de méthodes de combat des samourais (guerriers japonais du Moyen-Age) . Ce sport a été inventé par Monsieur Jigoro Kano qui a étudié toutes ses techniques aux environs de 1880. Il a été introduit en France et en Europe vers 1945. Il existe deux formes de judo: le judo debout,et le judo au sol. Le principe du judo debout est de faire tomber son adversaire sur le dos. Il y a plusieurs familles de prises: on peut faire tomber l'adversaire en s'aidant des bras,des jambes, des épaules, des hanches et de son propre poids comme dans "tomoé naghé" (appelé la planchette Japonaise) .

Dans le judo au sol, il faut, soit contrôler son partenaire pendant trente secondes sur le dos par des prises appelées "immobilisations", soit l'étrangler, soit lui faire une clef de bras.

Les Français sont très forts en judo. C'est le deuxième pays au monde après le Japon,et à égalité avec l'URSS. Aux derniers Jeux Olympiques , la France a remporté une médaille d'or, des médailles d'argent et des médailles de bronze. Le judo breton se porte bien aussi, avec de bons judokas et de bons club, surtout dans les grandes villes.

Alors ! Venez vous battre avec nous !

Morgan Ar Gwalc'h .

Ar Furlukin Floriant


D'an 12 a viz Kerzu e oamp aet da welet ar Furlukin Floriant . Mat e oa peogwir e oa fentus : Staotañ a rae ha klevet a raed trouz ar staot . Ober a rae ardoù gant e voued . Gwalc'hiñ a rae ur bank bep gwech er memes lec'h hag e c'hwezhe klogorennoù saovon gant e c'henou . Met ne gomze ket ar Furlukin Florian:trouziou a oa e plas ar poziou .

Tangi Ar Borgn .


Le spectacle de Noël de la ville .

Le 12 décembre dernier nous sommes allés au centre Jean Savidan pour voir le spectacle de la ville . Un numéro de clown . Le décor était composé d'un banc et le clown était habillé en clochard . La première scène fut le nettoyage de ce banc qui provoquait des nuages de poussière . Après un petit somme, le clown décida de manger mais la glissade que tout le monde attendait n'arriva pas . Il termina le spectacle en tenue de plage (un caleçon en guise de parasol) , allongé sur le banc . Ce spectacle aurait été très bien si le clown n 'avait pas répété autant les mêmes farces . Malheureusement ce spectacle était plutôt pour les petits.

E-pad an amzer-se, e
klask Tom pakañ
an eil marc'h a zo gloazet



klask a ra pakañ anezhañ met
ar marc'h fuloret a c'hloaz Tom



Dont a ra Tom en dro gant
ar marc'h e lerch m'eman Bill



Divizout a reont ez aio
Bill da gerc'hat sikour ha
chas hag e-pad an amzer-se
ez aio Tom war vord ar stêr
gant an azenn




E-pad an amzer-se ne wel ket
an arzh gloazet ez eus un
arzhig o heuliañ anezhañ.



kavout a ra ur poull-dous
evit digontammañ e gloaz
c'hoant en deus an arzhig
mont gantañ met an arzh
ne fell ket dezhañ.




pareañ a ra an arzhig an
arzh o lipal ar gloaz.




Evil trugarekaat anezhañ e
prof an arzh pesked d'an
arzhig



Hag ez eont da gousket.



huñvreal a ra an arzhig
e gwallzarvoud e vamm.



hag en arzh gloazet bet
kavet gantañ



Aon en deus ar chasour
war vord ar stêr





Les sports d'hiver aux Karellis

"Les Karellis" se trouvent dans les Alpes dans le Sud - Est de la France, dans le département de la Haute Savoie, au-dessus de Saint - Jean - de - Maurienne. "Les Karellis" appartiennent à la commune de Montricher. Le paysage est beau! De la neige, des sapins verts et... des skieurs. Il y a des cours de ski pour les enfants et les parents. Tous les moniteurs et monitrices de ski sont habillés avec un survêtement de la même couleur, pour qu'on puisse les reconnaître. La couleur change tous les ans. Ce n'est pas le tout d'aller se promener: il faut aussi apprendre à faire du ski!!

Pour s' équiper ce n'est pas difficile: il faut aller dans une salle où l'on loue des skis et les bâtons; une fois loué les skis, on s'inscrit à un cours selon l'âge. Quelques jours plus tard, commencent, les compétitions; en voici la liste: l'ourson pour les tous petits.

Etoiles	Flèches	Fusée
-flocon	fléchette	-bronze...
-1ère étoile	-bronze	
-2ème étoile	-argent	
-3ème étoile	-vermeil	
	-or	


Comme le temps change(l'hiver il neige,l'été il fait beau) l'été les moniteurs et monitrices de ski ne font pas le même travail qu'en hiver;par exemple:sur onze moniteurs et monitrices interrogés il y avait un cultivateur,un qui ne faisait rien d'autre,un guide de montagne,un menuisier,deux charpentiers,un étudiant un ouvrier d'entretien dans une usine ou qui travaille dans le bâtiment et deux routiers.

Le patois savoyard est la langue de là - bas c'est un dialecte de l'italien.Il est parlé de moins en moins; seules les personnes d'un certain âge le parlent encore et les jeunes presque plus. D'après ce qu'on nous a dit, il n'est pas officiellement enseigné à l'école. Il n' y a pas d'école bilingue ni d'équivalent de "Skol Diwan". Nous avons appris "bon - vèpres" ce qui veut dire "bonsoir" . (Je ne suis pas sûre de l'orthographe.) C'est une petite station où l'on ne fait la queue ni au télé-siège ni au télé-ski. On s'y amuse beaucoup, on peut y aller été comme hiver.

Evit ober -armoù Al Laeron-mor


ijinet gant Peter Klaus Alfinger

Ar sabrenn:



Kermeret vez ar
blankenn goat (ur
voest koat)
hag un tamm ler
evit ar sabren
hag ar gontellig.

ar gontellig:



ar black jack:



tammou ler

gwenn ha du pegeb.

ar pistolenn laer
mor:



skrivet gant:
Benjamin
Nicolas

HOR BEAJ DA ROAZON

Diriaou 15 ha Digwener 16 a viz kerzu e oamp aet da Roazon da welet hon c'henskriverien . Kemeret hon boa ar "michelin" eus Lannuon betek Plouared .Goude-se hon boa kemeret an tren "Corail"betek Roazon.Degemeret e oamp bet gant bugale CM1 - CM2 skol ar Frankiz .Aet e oamp en o c'hlas evit dibab piv a yaje gant piv .Goude e oamp aet da zebriñ er c'hantin .Goude kreisteiz e oamp aet da welet mirdi Breizh , ha da bourmen e liorz an" Thabor".Neuze e oamp aet da welet ur film war sonerien ar strollad "Gwerz " .D'an noz hon boa debret er c'hantin gant tud bugale Roazon ,ha kanet hon boa ,a-raok mont da gousket e ti hon c'henskriverien.D'ar gwener beure e oamp aet da welet an ti-kêr ha degemeret e oamp bet gant An Aotrou Duval, kuzulier kêr Roazon : kanet hon boa c' hoazh ha goude e oamp aet da welet Breujoù Breizh. Goude kreisteiz e oamp aet da selaou Myrddhin, ur barzh hag a c' hoari an delenn .Neuze e oa poent mont d' an ti -gar evit dont en-dro da Lannuon.

THOMAS TANGI

Kleñved ar saout nij .

Ur c'hleñved nevez hag izki a zo bet tapet gant ur vuor'h nij en un ti-feurm e Louargad: ur mintin ez eas paotr ar feurm da lakast e saout-nij da vont en sabb evel boaz. Ur tammig goude-se e velas he doa ur vuor'h graet un tamm kaoc'h hag a oa e liv glas hag un tammig gwenn. Spontet, e pellgomzas d'ar medisin evit ma teufe disout. Ur pennadig-goude-se e tiguvezhas ar medisin er feurm da velout an tamm kaoc'h. Ur c'hard eus goude e oa ar medisin en ti evit displegan d'ar familh he doa ar vuor'h klav lonket ur goumoulenn re bras eviti.

Ronan An Eskob

Ar wastellenn ananas

Ezhomm ho peus:

- 100 gr sukr poultr
- 1 voestad ananas skejennet
- 200 gr bleud
- 1 pakad goell-bier
- 2 u a-bezh
- 2 loaiad vras laezh
- 2 loaiad vras koavenn fresk
- 100 gr amann

Doare ober:

- 1- Lakait an amann da deuziñ, ha neuze lakait da yenaat.
- 2- Lakait warno ar bleud, ar sukr poultr, hag an u. Meskit mat.
- 3- Pa z'eo flour ar meskaj, skuilhit laezh hag an amann yenaet.
- 4- Skuilhit e-barzh ur voul amannennet, lakait war an taoz, ar skejennoù ananas
- 5- Poazhañ e-pad 30 m er forn (ther: 6-7)
- 6- Mirit ar chug ananas.
- 7- Lakait ennañ 8 tamm sukr
- 8- Pa' z eo poazhet ar wastellenn, tennit anezhañ eus ar forn, ha skuilhit ar chug ananas war c'horre.

Kan Ar Bobl 1989:

5 bloaz' zo dija!


E miz du 1983, e oa bet krouet kentañ klas divyezhek e skol-vamm Savidan. Jean-Dominique Robin a oa hon mistr. 12 e oamp: Morgan, Visant, Stefani, Goulven ,Severine ,Aurelian ,Kelig ,Benjamin ,Thomas ,Romain ha Lenaïg.Kempenet hon boa Kan Ar Bobl e Pempoul e miz meurzh 1984. Kanet hon boa "Ur Yarig, Ur Yarig","Ar Sizhun" ha"Yann Gorig o tañsal". Gounezet hon boa Kan Ar Bobl Bro Dreger ha Goelo, profet e oa bet ur vedailhenn deomp. Goude , e oamp aet d' an Oriant e lerc'h hon boa kollet: bugale Rostren eo o doa gounezet. E 1985-1986-1987 e oa Gilbert Geffroy hon mistr. Ar bloaz paseet hon boa gounezet en-dro e Treleven, o kanañ un heuliad gavotenn. Spi hon eus e teuio ar maout ganeomp c'hoazh er bloaz-mañ e Bear!!

Lenaïg Monier

- Gazetenn divyezhek brezhoneg-gallec o tont er maez bep 2 viz
 - Embannet gant kenseurterezh Skol J. Morand (OCCE)
 - Merour : J.D. Robin - Skol Joseph Morand - 22 300 Lannuon.
 - Skrivet gant bugale ar CM2 divyezhek
 - Bizskrivet gante e IUT Lannuon (kevrenn an urzhiaterezh)
 - Priz an niverenn : 10 FF
 - Koumanant evit ur bloavezh (3 niverenn) : 25 FF + mizioù kas
 - Bruderezh : Kenseurterezh CM2 divyezhek
Skol J. Morand - 22 300 Lannuon
(2 FF evit 5 linenn.)
 - Moulet dre liesluçhskeudenniñ er Skol J. Morand.
- 200 skouerenn anezhi

- Journal bilingue breton-français bimestriel
- Edité par la Coopérative Scolaire du CM2 bilingue
de l'Ecole Joseph Morand - 22 300 Lannuon.
- Gérant : J.D. Robin
- Rédaction : les élèves du CM2 bilingue
- Traitement de texte : les élèves + Mc Intosh
(Département Informatique . IUT de Lannion)
- Prix du numéro : 10 FF.
- Abonnement annuel : 25 FF + frais d'expédition.
- Publicité : Coop. CM2 bilingue . Ecole J. Morand.
22 300 Lannuon.
(2 FF pour 5 lignes)
- Imprimé par photocopie à l'école J. Morand.

tirage : 200 exemplaires.



emañ BRO ar Bigoudenned o c'hortoz kazetennerien
ar "Vuoñh Nij"...